

Petra nevez gant ar rock ?

Solo gitar Marty

1. Eus petra eo tennet ? Kont an istor.
2. Deskriv ar sonerezh, en un doare objektivel
3. E peseurt bloavezh e c'hoarvez ar senenn ?
4. Petra a soñj an dud e-barzh ar sal ?
5. Penaos displegañ frazenn ziwezhañ Marty ?

Oberenn 1

Titl : *Rock around the clock* (1955)

Soner : Bill Haley

6. Deskriv ar sonerezh, en un doare objektivel. Da skouer, komz diwar-benn : binviji, son, ritm, poziou...

7. Selaou kanaouennoù eus tro 1950, war ar padlet. Peseurt diforc'hioù a welez etre ar re-se hag ar rock o paouez en em gavout e Amerika ?

Oberenn 2

Titl : *All along the watchtower* (Albom *Electric Ladyland*, 1968)

Sonaozour / Soner : Jimi Hendrix

8. Penaos eo ar c'han ?

9. Deskriv binviji an oberenn-mañ.

- An hini skiltrañ zo _____ . _____ kordenn **en deus**.
Seniñ a ra soloioù alies, gant pe hep efedoù-son.
- An hini boutañ zo _____ . _____ kordenn **en deus**. Seniñ a ra ar rolloù boud.
- An hini a ro al lusk eo _____. Ober a ra war-dro an diazez-dastalm. Peurliesañ, eo eñ a ziskouez peur kregiñ da ganañ.

10. Petra eo stummidigezh-binviji « klasel » ur strollad rock, eta ? (4 tra). Gra ur brastres eus o flas war al leurenn :

Oberenn 3

Titl : *Bohemian Rhapsody* (Albom *A night at the Opera*, 1975)

Sonaozour / Soner : Queen

11. Daoust ha framm ur ganaouenn glasel zo gant ar ganaouenn-mañ ? Da skouer, diskan ha pozioù ?

12. Peseurt titouroù a ro dit war ar framm sonerel m'eo ur Rapsodienn ?

13. Peseurt binviji a glever ?

14. Petra zo divoutin, nevez, er ganaouenn-mañ ?

Oberenn 4

Titl : *Wind of change* (Albom *Crazy World*, 1990)

Sonaozour / Soner : Scorpions

15. Ro stummidigezh-binviji ar ganaouenn-mañ. Petra lavaret diwar he fenn ?

16. Lenn troidigezh ar pozioù. Petra lavaret diwar an tem-mañ ?

Oberenn 5

Titl : *Hallelujah* (Albom *Grace*, 1994)

Soner : Jeff Buckley

17. Ro stummidigezh-binviji ar ganaouenn-mañ. Petra lavaret diwar he fenn ?

18. Petra a c'hell bezañ tem ar ganaouenn, diouzh klevet ?

19. Penaos eo anvet ar stil kanaouenn-rock-mañ ?

Istor ar rock

Ur jener sonerel deuet war-glev e penn kentañ ar bloavezhioù 1950 eo ar rock.

Eilet e vez ar **c'haner**, alies, gant **ur gitar tredan**, **ur gitar boud** hag **un toumperezh**.

Plediñ a ra ar rock gant sujedoù niverus, evel ar politikerezh hag ar c'hudennoù sokial.

Dont a ra da vezañ un emsav arzel, anavezet e metoù ar spered, ha war un dro ul luskad eus ar c'hultur enep.

Santet e vez dreist-holl an dra-se da vare festivalioù bras e fin ar bloavezhioù 1960, evel Woodstock (1969), m'eo en em strollet ur 450 000 hipi bennak evit rannañ o c'harantez eus ar sonerezh, met ivez ar sell o doa war ar bed : a-enep brezel ar vietnam e oant, da skouer.

20. Kinnig ur ganaouenn rock

Deiziad :

Anviù :

Penaos eo ma labour ?

S				
K				

a	Anv ar ganaouenn, ar strollad, ar c'haner...	
b	Bro-orin ha bloavezh	
ch	Stummidigezh binviñ	
c'h	Lakaat selaou ar ganaouenn (Youtube / USB / CD...)	
d	Stil rock ? Evel da skouer... ?	
e	Perak em eus dibabet honnezh ? Petra a gavan dedennus ? 4 abeg (pe muioc'h)	
f	Brezhoneg brav	
g	Mouezh kevabl, emzalc'h	